

*Sant Segal*

---

# KANTIK

## SANT SEBASTIAN

---

Tox : *Sanctorum meritis.*

O Sant Sebastian, maro evit ar Feiz,  
 Prijit selaou peden ar bobl demeuz a Vreiz ;  
 E parrez Sant-Segal, lec'h 'ma ho relegou,  
 Hor mirit deuz ar c'hlenvejou.

Azalek goulou deiz, beteg ann noz sarret,  
 Azalek ar c'huz-eol, beteg ma ve savet,  
 Beb heur hag heb paouez, pa z'omp e iec'het c'hoaz  
 Hor c'hendalc'hit krenv ha dinoaz.

Diouallit ac'han-homp, Merzer ken gallouduz,  
 Ha pellait diouz-homp ar c'hlenvet ken euzuz,  
 Ar c'hlenvet a zistruj heb truez na remed :  
 Ar vosen e z'eo hanvet !

Prijit-ta hon difen, ni hag hor mignounet  
 Deuz ann oll guall-heuriou ha deuz eur seurt klenvet,  
 Ni, pere a amzao oc'h Jezuz hag he Vam  
 Koulz hag ouz-oc'h, n'omp ket divlam.

C'hui, Merzer, dre m'oc'h bet maguet e ker Milan,  
A gassaz deuz ar vro eur vosen vraz buan ;  
Hag a c'hellaz obten ive digant Doue,  
Na zistroje ken er vro-ze.

Zoe, eur vaouez vud, hoc'h euz c'hoaz pareet  
Ha d'he goaz, Nicostrat, ar iec'het hoc'h euz rentet ;  
Kement-se, hoc'h euz gret dra eur burzud ker braz  
Ma ze' an oll souezet c'hoaz.

Pa voa tud a feiz krenv, guechall o c'houzanvi,  
C'hui a roe d'he nerz enn ho merzerenti,  
En eur voaranti d'he eur vuez peur-baduz  
Hag eur gurunen lugernuz.

O Sant Sebastian, Merzer leun a verit !  
Keit ma vimp e buez, gan'comp ato chomit ;  
D'ann Drindet ha d'hor Mam, ar Verc'hez benniget,  
Hor recommandit oll bepret.

Diouallit, pareit, ha chenchit ac'han-homp,  
Kendalc'hit evit mad, ar vosen pell diouz-homp.  
Vit ma c'hellimp e peoc'h, meuli e peb amzer  
Tad ar verzerien, hor Zalver.

Ha pa zeu Jezuz hor barner d'hor gervel,  
Pa vo sonet ann heur ma vo red d'comp mervel,  
Obtenit m'hon d'o perz e gloar ar verzerien,  
Ma velimp Doue da viken.

C'hui a vel enn envou, e touez ann oll Elê,  
Caourintin, hor patron, he vignoun Guenole,  
Ho fedit evid-homp, hag ivez ar zent all,  
Ma teuio Doue d'hon diouall.

Dre ho pedennou mad, ha gras hor Redemptor,  
Tennit ann anaoun euz tan ar purgator :  
Grit ho lemel a boan, 'vit ma zaint d'hor gortoz  
Enn eurusdet ar baradoz.

*Evel-se bezel great.*



IMPRIMATUR :

Corisopiti, die 2 Junii 1870.

**EVARD,**

*Vic. gén.*